



Anv :

Priziadenn 2011 Live B1 - Lenn

Lennit an destenn ha respontit d'ar goulennoù

Sten : Bouedmirer.

1-« Aet e oa ar mil da bemp kant » a dalv :

- An embregerezh he doa graet freuz-stal
- Ranket o deus skarzhañ 500 den diwar o labour
- Prenet o doa nebeutoc'h a donennoù pesked
- Aet e oa re uhel priz ar pesked

2-Perak eo ken anavezet e anv familh er Vro Vigoudenn ?

3-Petra emañ Sten e soñj ober pa 'z ay e dad e retred ?

- Mont en-dro war e studioù
- Mont da vageal war bagoù Saupiquet
- Kemer plas e dad
- N'ouzer ket

4-Petra a veze graet e fin ar c'hantved diwezhañ evit an arc'hant ?

- Dont a rae an dud da labourat d'ar Vro Vigoudenn
- Mont a rae an dud da labourat d'an estren vro
- Gwerzhet e veze ar friturioù
- Skarzhet e veze al labourerien er-maez eus ar friturioù

5-E Bro-Varoko n'eo ket ken barrek an dud da fardañ :

- Sardin gant tomatez
- Sardin gant bezhin
- Ton gant keuz
- Ton gant tomatez

6-Gwir/Gaou

		<i>Gwir</i>	<i>Gaou</i>
a	Rekipeoù nevez a vez graet gant ar stal Furic		
b	Ar vamm, ar c'hoar hag ar mab a labour en embregerezh		
c	Krouet e oa bet ar stal Furic e 1990.		
d	Sten en deus bet labourer war bagoù Intermarché ha gant Saupiquet.		
e	Digoret e vo ur skourr gant an embregerezh Furic e Maroko.		
f	Ul lodenn eus produioù ar stal Furic a vez gwerzhet dre ar post		
g	Studioù war ar c'henwerzh en deus graet Sten		
h	Savet eo bet ar stal Furic gant Sten.		

Sten : Bouedmirer

Ken entanet hag e dad-kuñv eo gant micherioù ar fritur.

Un anv brudet en deus : Furic.

Yann mil vicher eo eñ. Ober a ra war-dro ar c'henwerzh e Breizh hag e Bro-C'hall a-bezh. Sellout a ra a-dost ouzh an daoreoù ma vez fardet ar boestoù-mir. Sikour a ra e dad da lakaat ar stal da vont en-dro.

« 800 tonenn a besked a vez prenet ganeomp bep bloaz : ton, sardin, brizhili, grillhed traezh... Hag a bep seurt meuzioù a vez fardet ganeomp. Soubenn, ton giz Breizh gant chalotez hag ognon, sardin gant tomatez, brizhili gant gwin gwenn ha sezv, ravioli, avu boultouz ha fourmaj sardin. Gwerzh et vezont e-barzh stalioù bihan, dre ar post, en ostalerioù hag er pretioù ». Entanet eo an den o kontañ e labour. « Ar pesked a blij din kalz. Forzh pelec'h e vin ez in atav da welet ar pesked, e peseurt mod e vezont fardet, hag e peseurt mod e vezont debret. Ha me a blij din fardañ boued. Mennozhioù nevez am bez atav. Dek rekipe am eus "o c'hortoz" da nebeutañ. »

Un anv brudet

N'eo ket gwall vrudet an den yaouank. Brudet mat eo e anv koulskoude. A-viskoazh e Vro vigoudenn, ha pelloc'h c'hoazh.


E 1920 e oa bet savet ar stal « Furic » gant e dad-kuñv hag e dad-kozh (a oa 13 vloaz d'ar poent-se). Gant ar familh eo bet renet betek fin ar bloavezhioù 1990 Gwerzh et ar bagoù da Intermarché. Gwerzh et ar fritur da Saupiquet. Aet e oa ar mil da bemp kant.

« Ma zad, Jean-François Furic, en deus adkroget e 1999, diwar netra. Ne oa nemet pevar den er stal, er penn kentañ. Tregont a zo bremañ. » Ar vamm, ar c'hoar, hag ar mab en o zouez. « N'em eus ket santet "pouez ma anv" war ma chouk, na pouez ar familh. Studioù war ar jedoniezh hag ar c'henwerzh am eus graet. D'ar poent-se e oa ma zad oc'h adsevel ar stal. Deuet e oan da skoazelliñ anezhañ e-pad un toullad mizioù. Ur bloavezh e soñje din chom. » Hag eo chomet da vat. « N'on ket bet rediet. Plijout a rae al labour din.

Met pa 'z aio ma zad war e leve e vo diaesoc'h. Ret e vo din bezañ barrek da genderc'hel. »

Mont war-raok atav.

Ar paotr yaouank n'en deus ket santet pouez ar familh. Met levezonet mat eo bet gant ar pezh en deus gwelet en e vro e fin ar c'hantved paseet. « Soñj am eus pa veze gwerzh et ar friturioù er vro, evel ar fritur Chacun. Graet e veze an dra-se da c'hounit arc'hant. »



Ha tamm ha tamm e oa al labour o kuitaat Bro Vigoudenn.

« Abaoe kant vloaz e veze graet boestoù-mir e Bro Vigoudenn. Ur vicher a oa en ul lec'h, gant tud barrek o chom el lec'h-se. Evidon-me e oa ur binvidigezh.

Ur skwer eo hag e fell din kenderc'hel gant ar binvidigezh-se. Marc'hadmatoc'h e vez paeet an dud er broioù all evel-just. Met ne zeuont ket a-benn da fardañ boued kenkoulz hag amañ. Sardin fresk a zo e Maroko, met n'int ket gouest da labourat sardin hag ober sardin gant tomatez kenkoulz hag er Vro Vigoudenn. Ret e vez deomp kavout mennozhioù nevez atav. Fourmaj, meuzioù nevez... Gant ar bezhin e c'heller ijinañ traoù nevez ivez. »

Aon rak ar bed o treiñ hag o cheñch buanoc'h-buanañ? Tamm ebet pa glever Sten Furic. « Ar pezh a blij din eo labourat a-stroll. Lakaat ar vicher da gemm ha mont war-raok gant an dud. »

Diwar Le Télégramme

"Spered ar vro" gant Lionel Buannic



Anv :

Priziadenn 2011 Live B1 - Skrivañ

**Kontit ho micher pe ur vicher all ho pije bet c'hoant da labourat warni (20
linenn da nebeutañ)**